

# BED NEVEZ 1

Mont a rin, ya, lavaret a ran dit ec'h in, mennet ha dibreder. Indan heol seder an deiz nevez, ne vo nemet ur gwelva o trelañ ma daoulagad. Kaerat hini : tosennoù dous dianav, saonnenoù kuñv koachet c'hoazh o c'hortoz ken ec'h afen-me d'o dizoloiñ. Me, baleer-bro disoursi, ergerzher ar bed flour o krenañ un disterañ a-frapadoù-igoù dre ma 'h in war a-raok, evel souezhet ouzh ma anavezout.

Na pa vefe noz... Mont a rafen kenkoulz all. Un nozvezh karantezus e vefe, unan a zamguzh an traoù hag a laka liv ar c'hevrin war bep tra, unan dener a bak an nen en he fallenn frealzus. A-dastorn ec'h afen neuze. Broudet gant an aonig o verviñ ennon e santin ar bed, ec'h anavezin ar bed dre daskren ma bizied diasur, kemeret gante plas ma daoulagad dall.

Ne glaskin ket stourm ouzh ar boem. Na pa vefen faezhet, petra 'rafe se din-me ?

Mont a rin, dedennet gant ar frondoù mezevennus, sachet gant galvoù mouskomzet a zassono didrec'hus em c'hreizon.

Pe vo deiz pe vo noz, ec'h in. Ec'h efomp. Pep hini ac'hanomp a vo evit egile ur bed nevez.

Pa vin kalonek a-walc'h e lavar in kement-se holl dit.

## AR WECH KENTAÑ

Ur wech ouzhpenn e reas ur sell a-dro ouzh diabarzh he studio. Pep tra a oa en e blas. Klenket. Urzhiet. Diboul-trennet. Skubet he devoa al leur meur a wech. Naetoc’h ha kempennoc’h evit se n’anaveze ket, nemet ti he mamm-gozh, evel-just. Gwir eo ne oa ket ur pezh labour ober war-dro he zammig lojeiz. Un doare ranndi-skouer eus ar pezh a oa ul lojeiz evit ur studierez e Roazhon : ur pezh bras – ha c’hoazh, se a zepant peseurt talvoudegezh a roer d’ar ger *bras* – hag ur c’hognig-kegin, ur c’hogn all ken bihan all a veze graet “sal-dour-privezioù” anezhañ, ha sed aze graet tro he domani.

C’hoazh ne oa ket da glemm. Ne oa ket re ger-holl, ingalet brav a-walc’h e oa bet, goude ma oa kozh ar savadur. Amezeien uheloc’h, amezeien izeloc’h. Sioul e oant, ne raent ket re a drouz. N’anaveze ket anezhe. Un « demat » dister taolet buan asambles gant ur sell digas p’en em groazient e-barzh ar skalier, kement ha bezañ seven, ha sed aze tout. Aze, pell eus ar gêr, he devoa gallet adsevel he bed-hi. Ar bedig-se a oa ennañ ur gwele, un daol-noz, div gador, ur burev bihan, taol-labour ha taol da zebriñ a bep eil... Un toullad skritelloù ouzh ar mogerioù gwenn. Levrioù war un estajerenn, ha poltred mamm-gozh, just a-walc’h, en e stern, e penn an estajerenn.

Mamm-gozh o c'hoerzhin outi evel na rae ket alies, disoursi, e-barzh he jardin, dirak he zi, eno e Bro-Dreger. Ne oa ket aezet kemer poltredoù eus Mamm-gozh, kar n'houle ket james. Alies, war ar poltredoù, e veze gwelet gant he daouarn o klask koach he bizaj, peotramant o kammañ he beg espres-kaer. Ur poltred anezhi a vefe ur poltred c'hwitet, forzh penaos, koulz 'oa c'hwitañ anezhañ penn-da-benn. Met war ar poltred-se e tiskoueze ur mousc'hoerzh sklaer ha gwirion, dibreder. N'he devoa ket bet difiz ouzh he merc'h-vihan gant he fellgomzer hezoug. N'he devoa ket komprenet diouzhtu e oa o kemer ur poltred gant un dra graet evit pellgomz, sañset !

Direnket e voe o welet he mamm-gozh o sellet outi evel-se, diwar hec'h estajerenn, gant levezeg he daoulagad glan ha didro. Re c'hlan. Kemer a reas ar poltred, plegañ an tamm kartoñs a oa a-drek da harpañ anezhañ, hag e renkañ e tiretenn he zaol-noz.

Poan he devoa o chom poz. Ne rae nemet dont ha mont dre ar gambr. Ne oa ket evit chom sioul da vat. Da betra en em chalañ evel-se ? Prest e oa pep tra, koulskoude. Met daoust ha prest e oa-hi ?

— 'Peus ket da vezañ nec'het, he devoa lavaret he c'hamaradez Gwenn dezhi, n'eo ket diaes ! Tremen a ray mat. Mar kerez eo me a ingalo an emgav, mar kavez aezetoc'h ?

Erru e oa an deiz hag an eur. An takad oabl a spurmante dre ar prenestr a zalc'he da deñvalaat, buanoc'h-buanañ, a gave dezhi, ha da-heul e save an noz en he studio. Du-hont, en he bro, e oa an heol o vont da guzh a-drek meur-dez reier bras an aod, prest da sankañ er mor, en un daoler ur wech c'hoazh e flamm ruz dre an oabl ec'hon o 'n em veskiñ er pellder gant an houlennoù. Amañ 'vat e oa koa-

chet dija gant ar savadurioù betoñs uhel, ha gouleier kêr a rae kevezerezh didruez d'e sklêrijenn erru dister.

Sellet a reas ouzh an eur, evit an nouspetvet gwech : 6e30. Ne vefe ket pell ken, sur a-walc'h. Ne oa ket savet mat he selloù diwar he hezoug ma skoe unan bennak war an nor. Tri zaolig abaf. Gant jestroù bihan nervus e reas un tamm adkempenn diwezhañ d'he brozh. Ur vrozh un tamm mat berroc'h evit ar re a gustume lakaat. Prestet e oa bet dezhi gant Gwenn. Buan-ha-buan e sellas outi hec'h-unan er melezour bihan e-kichen an nor. Ha hi 'oa ar plac'h yaouank-se, gant ar vrozh du verr-se, ar gorrvenn wenn skañv a laoske dispak krec'hig he bruched ? Ha dezhi e oa ar muzelloù-se livet e ruz ? Hag an daoulagad brumennek-se o tiskouez, ma selled mat, ar from en he c'halon ? Amzer dezhi d'en em c'houlenn c'hoazh hag-eñ e vefe kavet koant a-walc'h ma tassonas taolioù all war an nor. Kreñvoc'h an dro-mañ.

Pa zigoras en em gavas dirak ur gwaz, gwisket brav, etre tregont ha daou-ugent vloaz, marteze. Chik a-walc'h, a soñjas en desped dezhi. En em zalc'her a rae reut un tamm, a gave dezhi, evel ma ne vije ket bet re en e aez. Ar wech kentañ e oa evitañ ivez, marteze ? Hi, ken jenet all, a chome en he sav e toull an nor da sellet outañ. Dre ma ne lavare netra eo eñ a gomzas da gentañ.

— Ma ! Salud ! C'hwec'h eur hanter a oa bet lavaret, 'gav din ?

— Ya.

Respontet he devoa, met hep fiñval. Evel ma vije bet morzet hec'h empenn. En traoñ e voe klevet an nor-dal o tigeriñ hag o stlakal hec'h-unan pa serras en-dro, ha trouz kammedoù un den o tont war-grec'h gant pazennoù ar skalier koad kozh o wigourat un tamm indanañ.

— Ma ! C'hem ! Marteze 'c'hallan dont 'barzh, neuze ? a c'houlennas ar paotr, evel nec'het.

— A ! Dañ... ya. Ya, evel-just. Deuit.

Sellet a reas ar paotr en-dro dezhañ pa antreas er studio, ha laoskel war kador ar burev ar sac'hig lêr a oa gantañ, hep goulenn pe oa mat pe ne oa ket. Evel ma vije bet er gêr.

— Arri eo teñval, bremañ, hañ ? a c'houlennas.

— Ya, gwir eo.

O vont da lakaat ar gouloù bras e oa, met kavout a reas gwelloc'h enaouiñ al lamp vihan war he burev. N'he devoa ket c'hoant da welet ken sklaer-se, a-benn ar fin. Kerkent e welas selloù ar paotr troet etrezek ar voger a-us d'he gwele, ha keuz bras he devoe nompas bezañ soñjet e-barzh an dra-se kentoc'h : ar skritelloù ouzh ar voger, a oa deuet ganti eus he c'hambr e ti he zud, skritelloù strolladoù sonerezh, poltreoù kizhier bihan ha loened moutik a bep seurt, a embanne splann peseurt plac'h vihan, peseurt krennardez e oa bet. Disklêriañ a raent ken sklaer all peseurt plac'h yaouank e oa bremañ, ur plac'h yaouank a oa dalc'het ul lodenn vras anezhi c'hoazh e bed klet ha tener he bugaleaj.

Met ar paotr ne ziskouezas ket ober van oute.

— Koantik eo, amañ, a lavaras nemetken.

Siouloc'h e oa bremañ evit pa oa en e sav war ar pondalez, just a-raok. Suroc'h anezhañ e-unan e seblante bezañ. Tostaat a reas goustad outi. O-daou e oant bremañ, en o sav, e-kreiz ar gambr.

— Koantik eo pep tra, amañ, a lavaras c'hoazh, gant ur mousc'hoerzh bihan hag ur skleur lemm en e zaoulagad c'hlas ac'h eas don en hec'h askre.

Hag e lakaas e zorn en he blev.

Stourm a reas-hi evit chom hep ober ur fiñvadenn war-dreñv. Chom a reas aze, sonn, reut, dirakañ.

Eñ a zalc'he da hardishaat. E zorn sanket en he blev hir ha fuilh, abaf un tamm da gentañ, a savas betek he chouk, a grogas da flourañ, ha neuze da stardañ, he c'hilpenn. An dorn all a bozas war he dargreiz. Skañv da gentañ, ha neuze pounneroc'h. Buan e risklas war he feñsoù.

Bremañ e oa spег outi. Delc'her a rae anezhi start ouzh e gorf, hag e c'halle santout ar c'hoant o kreskiñ ennañ. E zaouarn nerzhus, evel trelatet bremañ, ac'h ae hag a zeue dibaouez krec'h-traoñ war gened he c'horf e barr he yaouankiz. Hi na rae netra, nemet laoskel anezhañ d'ober, tapout krog evel ma c'halle en e zivskoaz, kuit da gouezhañ.

Frotañ a rae e vizaj ouzh hec'h hini, ouzh he divjod, he zal, he divskouarn... Pokoù bihan trelatet, bouchoù tomm entanet a laoske a bep eil war he c'hroc'hen luftr ha dinammm.

— Nann ! Mar plij... pas evel-se... pas aze... a dapas lavaret, bihan he mouezh, pa glaskas pokat dezhi war he muzelloù.

Ne seblantas ket bezañ na souezhet na divarc'het.

— A ya. OK. Mat eo.

Kerkent e adkrogas e zaouarn o vreskenn da waskañ war he zivronn, war he feñsoù, war gement lodenn eus he c'horf a oa. Indan he brozh. Ken e vrallent o-daou a bep tu e-kreiz ar gambr, hejet-dihejet gant barradoù follentez e gorf o tirollañ.

Gwelet a rae-hi ar poent ma ruilhfont o-daou war leur ar gambr. Ha se n'houle ket.

— Mar kerez 'c'hallomp mont er gwele ? a ginnigas neuze.

— Hañ ? A ya. Ya.

Dispegañ a reas outi ur pennadig neuze evit tennañ e zilhadr gant mall. Hi a reas kemend-all, goustadikoc'h. Hep taoler sell ebet outañ.

Eñ avat a selle ouzh ar c'horf noazh profet dezhañ.

— Koant out, emezañ. Deus.

Neuze e adkrogas an abadenn flourañ, tastornat, pokat. Bezañ evel-se kroc'hen ouzh kroc'hen a seblante lakaat an imor gouez da greskiñ muioc'h c'hoazh ennañ. Prestik e sachas anezhi d'e heul er gwele. En em silañ a reas kerkent etre he divc'har, ha mont enni. Aon he devoe un tamm, met souezhet e voe hec'h-unan o welet e oa prest he c'horf da zegemer anezhañ.

War unan eus ar skritelloù e talc'he ar c'hizhier bihan da sellet ouzh ar bed gant daoulagad bras souezhet.

Alaniñ kreñv a rae en he skouarn. Korf bras ha pounner ar gwaz a flastre hini mibin ar plac'h yaouank, tra ma talc'he e zaouarn gant korventenn o flouradennoù rust.

Eñ na soñje ket ken e tra ebet, ne oa ken nemet ur c'horf o klask war-lerc'h e blijadur. Hi, er c'hontrefed, a gave dezhi e oa dispartiet he spered eus he c'horf, ha tra ma 'h ae en-dro hec'h-unan al lodenn gorfel anezhi indan boutadennoù ar gwaz, evel ur mekanik bennak a dro e-unan ur wech lañset, e talc'he he spered da labourat ouzh e du ha da gas anezhi da lec'h all.

Kas anezhi war-giz en amzer a rae, en gwirionez. Ne oa ket bet gwall alies gant paotred, a-benn ar fin. Dont a rae da soñj dezhi eus ar wech kentañ tout. Gant he mignon, a oa ar wech kentañ dezhañ ivez. Soñj mat he devoa eus o jestroù dizampart ha lentik dezhe o-daou. Eus o strafuilh

mesket gant c'hoerzhadennoù. Eus ar frapad douster ha teneridigezh kaer-kenañ e oa bet. Eus an aon he devoa bet da gaout poan, ha penaos e oa tremenet an traoù naturel-tre ha dizroug, pe dost, a-benn ar fin. N'he devoa ket bet kement-se a blijadur, gwir eo, met brav-brav e oa bet, en em roet ma oant korf hag ene an eil d'egile, harpet gant ur garantezig yaouank na oa ket padet pell goude.

Soñj a zeuas dezhi ivez eus ur wech all, disheñvel-mik. Aze ne oa ket bet doare a garantez, nag eus he zu nag eus e hini-eñ, n'o devoa graet nemet mont da-heul galv o c'horfoù, un nozvezh rankontr. Soñj he devoa pegen souezhet e oa bet p'he devoa santet he spered o vont da netra, aloubet ha trec'het ma oa gant santadurioù he c'horf a-bezh. Ha penaos e oa bet bras-divent he flijadur, penaos he devoa huchet, en desped dezhi, hep gallout stourm ouzh un dra dianav dezhi, koachet enni, un dra brasoc'h eviti a oa aet dre-holl en he c'horf.

— Mont a ra ?

Komzet en devoa. Kaset e oa bet re bell ar plac'h yaouank gant red he soñjoù, moarvat. Ken e oa erru kazi nec'het ar gwaz, gant ar c'horf diene-se indanañ.

— Mat eo ? Plijout a ra dit ? a c'houlennas c'hoazh, hep paouez gant e labour-korf.

Kompren a reas e oa ret dezhi diskouez dezhañ ne oa ket diseblant.

— Dañ ya... ya. Mat eo.

Evit prouiñ dezhañ e oa ur gwaz gwir, galloudus ha barrek, en em stardas muioc'h outañ. Lakaat a reas he fenn en a-dreñv ha damserrin he daoulagad. Pakañ a reas e bastelloù etre he divhar, lakaat a reas he daouarn war e gein o c'hweziñ. Un efed bras a reas kement-se warnañ raktal, ha buanaat a reas e voutadennoù a galz.



Pa degouezhas dezhi alaniñ un tamm bihan kreñvoc'h e kemeras se evit un huanadenn a blijadur, ha neuze e voe freget pep harz. Ne voe ket evit delc'her ken. Gant un huchadenn raouiet hag hanter vouget, un asez ronkenn hir deuet eus pell, e echuas pep tra.

En em laoskel a reas da gouezhañ evel ur bern warni, hag e chomas ur pennad evel-se, difiñv, dialanet.

Hi, a-drek he malvennoù damgloz, a wele daoulagad karantezus he mamm-gozh o sellet outi e teñvalijenn tire-tenn an daol-noz.

Prestik goude e oa savet ar paotr, gwisket en-dro buan-ha-buan. Prest da vont. Sellet a reas outañ e-unan er melezour, adfichañ e vlev.

Hi ne oueze ket re petra 'oa mat dezhi ober bremañ. Divizout a reas sevel ivez, moarvat e oa dereatoc'h ober evel-se. Gant un tamm poan e kuitaas gwasked he gwele. Gwiskañ a reas he robenn-gambr da goachañ he c'horf noazh. Daoust d'ar pezh a oa o paouez c'hoarvezout e oa jenet c'hoazh dirakañ hag e oa aloubet gant un elevez souezhus. Roet he devoa trawalc'h dezhañ. Ambroug a reas anezhañ betek an nor.

Eñ a selle outi gant daoulagad diabaf ha seder, pozet e zorn war an dornell.

— Ac'hanta ! Bon ! Poent eo din mont !

Astenn e benn war-raok a reas da bokat dezhi, met hi na fiñvas ket. Pokat a reas dezhi memes tra war he jod.

— Ale ! Kenavo ar c'hentañ gwech neuze !

— Ya. Kenavo.

Ur sell evezhiek da welet hag-eñ ne oa den ebet er skalier.

Aet e oa.

D'ar poent-se e sonas he hezoug, he devoa laosket war an daol-noz. Met n'eas ket da respont. Chom a reas en he sav dirak an nor, evel sabatuët gant ar benveg-se o son, evel o tegas da soñj dezhi e oa ur vuhez all er bed distag a-grenn diouzh ar pezh a oa o paouez c'hoarvezout en he studio.

Pa chomas mut ar benveg bihan ec'h eas da welet. Ur gemenadenn a oa bet laosket gant he mamm :

— Ma... Salud ma foupig bras ! Mamm 'ni eo ! Bon... N'out ket aze, 'm eus aon... C'hoant 'm boa da welet penaos 'oa kont ganit... Atav o labourat ? Ma... Adesae a rin, neuze. Ale, pokoù dit, ma flac'h vihan ! Ro keloù, bihan !

Ne blije ket kenañ an dra-se d'he mamm, met kavout a reas gwelloc'h respont dezhi gant un SMS. Krenañ a rae he bizied un tammig pa bouezas war ar skramm da skrivañ : « Salud Mamm. Okupet on. Mat an traoù. Pokoù. »

Krenañ a rae he bizied c'hoazh pa gontas ar bilhedoù a oa bet laosket gant ar paotr war an daol-noz.